


Prantadoù pennañ ar Brezel Bras

I. Ar brezel fiñv



Diell 1.1: pegoulz e voe savet ar c'halvadeg?.....

Diell 1.2: petra eo ar mare evit al labour-douar?.....

Diell 2.3: perak e soñj ar soudarded e vo berr ar brezel?.....



Diell 2: Ar soudarded c'hal hag alaman a ya kuit da vrezeliñ evit ur prantad e soñjant e vo berr.



Diell 1: galvadeg e Frañs, d'ar 1 a viz Eost 1914

Diell 5: Rekiziñ a reas ar jeneral Gallieni, gouarnour Pariz an taksioù parizian evit kas ar soudarded fonnabl àr an talbenn, da vare emgann Marne e miz Gwengolo 1914 edan urzh ar jeneral Joffre. Kontiñ a reas ar jeneral Gallieni e-barzh e Memor an darvoud-mañ :

La 7ème division du général de Trentinian débarque à Paris dans la journée du 7 septembre. Je donnai l'ordre de réquisitionner tous les taxis-auto nécessaires pour le transport de l'infanterie de la division, l'artillerie et la cavalerie devant naturellement suivre la route de terre. Cette opération (qui mobilisera 400 taxis et permit le transport de 4000 hommes) a laissé un souvenir vif chez les parisiens.

→ argadoù alaman (Eost-Gwengolo 1914)
A-dal an 3 a viz Eost 1914, an argad alaman (plañ Schlieffen). Belgia,, Luksembourg neptu ha Frañs a zo aloubet.

Diell 3

→ argad alaman (Eost-Gwengolo 1914)
→ enep-argad gall (Gwengolo-Kerzu 1914)
Diell 4

An emgann Marne (jeneral Joffre) etre ar 6-9 a viz Gwengolo 1914 a lakaas an Alamaned da giliñ betek ar stêr Aisne.

Diell 3.4: penaos e voe anvet ar plañ savet get an Alamaned? Petra eo ar pal?.....


Diell 4-5: 5: petra eo emzalc'h ar C'hallaoued? Piv a voe e-penn an enep-argad?.....

II. Ar brezel difiñv: 1915-1917



Diell 6

Diell 7



Diell 6.6: E men e stabilas an talbenn?.....

Diell 7.7: Penaos e voe anvet ar brezel a grogas a-dal 1915?

Diell 6.8: roit anv 2 emgann e-pad ar prantad 1915-1917:.....



Diell 9: tennataerien a vro Senegal

<http://bac.d.free.fr>

Blezadoù dont er brezel ar Stadoù

Diell 8	Kenemglev	Kengrevredad
1914	Serbia Rusia Bro C'hall Belgia Rouantelez h-Unanet Japon	Aotria-Hungaria Alamagn Impalaeriezh osmaniad
1915	Italia	Bulgaria
1916	Roumania	
1917	Bro C'hres SUA	

Diell 8 ha 9.9:

Roit 2 skouer a-benn displegiñ en em ledanaa ar brezel er bed a-bezh:.....

III. 1917: "blezad ar strafuilh" Raymond Poincaré

Diell 10: emsavadegoù soudarded e 1917

Kamaladed, ho pezit soñj eus Craonne, Verdun hag ar Somme m'eo manet hor breudeur eno. Kamaladed en armeoù, e anv an holl gamaladed o deus sinet c'hoazh evit ma paouezo ar brezel e fin miz Gouere, ho pediñ a reomp d'hor harpiñ evit tizhout ar pal-se ha herzel d'al lazhadeg, d'ar brezel-se a zo e bal kentañ pinvidikaat ar gapitalourien ha distrujiñ renkad al labourerien. Derc'hel a refomp ar fozioù-difenn betek ar poent ha neuze e taolomp an armoù d'an douar.

Follenn nij sinet get soudarded a veur a rujumant
G. Pedroncini, Emsavadegoù soudarded e 1917, PUF,1967

1917: dispac'h e Rusia get bolcheviked a-du get mennozhioù Karl Marks; roiñ a reas ar tsar Nikolas II e zilez
Meurzh 1918: arsav-brezel Alaman-Rusia

- Diell 10.10: petra a zivizas ar soudarded-mañ e 1917?
- 11.Penaos e vez graet ag an emsavadeg-mañ?.....
- 12.Get peseurt darvoud e seblant ar soudarded-mañ bout levezonet? Diell 11:.....
- 13.Peseurt gerioù implijet gete a c'hell prouiñ ho respont?.....
- 14. Peseurt Stad a baouez da gentañ an emgannoù?..... Perak?.....

1917-1918: brezel fiñv en-dro: ar feiz en trec'h e 1918



Fiziet e voe renerezh armeoù ar c'henemglev er Marichal Foch. Adal miz Gouere 1918 e kasas ur rummad enep-argadoù en-dro, oc'h implijout an tankoù ma c'helle. E miz Gwengolo 1918e roas Foch urzh kas an argad meur àr rac'h an talbennoù, get sikour ar c'hirri-nij hag an arme amerikan.

Diell 11-12.15 :a-drugarez da betra e oa trec'h an Emglev?.....

Diell 11: tankoù Renault: 1600 tank a oa get Re-Unanet e Gouere 1918 hag àr-dro 60 get Alamagn



Marichal Foch



Diell 12:Kirri-nij amerikan Curtis e 1917: neuze e oa àr-dro 6000 karr-nij(3500 evit Frañs) get Re –Unanet hag àr-dro 3000 get Alamagn. E 1914 e oa 300(150 evit Frañs) ha 200 get Alamagn

Adal miz Gwengolo ne oa ket arme Alamagn evit derc'hel ar brezel ken. An dispac'h a c'hoarvezas neuze da heul c'hwitadenn ar vrezelourien. Rankout a reas Wilhem II roiñ e zilez; embannet e voe ur Republik ha sinet ar feur-emglev peoc'h get ar gouarnamant nevez sosialour Ebert, e Rethondes d'an 11 a viz Du 1918. Trec'het e oa Alamagn met n'eo ket aloubet.



Diell 13: sinadur an arsav-brezel e Rethondes er c'hoad Compiegne en ur wagon d'an 11/11/1918

- 16. Penaos e voe achumant ar brezel?.....